

Te Deum 9

Aotrou Sant Pêr, porzhier an Neñv, Aotrou
sant Mikael, mignon Doue.

- Aotrou Sant Pêr, porzhier an Neñv,
Aotrou Sant Mikael, mignon Doue

Aotrou Sant Mikael, chomet aze,
Me 'c'h a betek ma mab d'an Neñv,

Me 'c'h a betek ma mab d'an Neñv
Da glevet gantañ e doare.

- Bonjour, ma mab, a diabell.

- Bonjour, ma mamm, Gwerc'hez santel !

Bonjour, ma mamm, gwerc'hez a c'hras,
Petore keloù 'zo ganac'h ?

- Da c'hcoul pardon wit ar bec'herien
Dal ma raint gwir binijenn,

Gant ur gwir gontreksion
Ha soñj Jezuz en o c'halon.

- Pensaos, ma mamm, o fardonñ,
Soñjit en ofañsoù o deus graet din.

Sellet, ma mamm, ha sellet c'hoazh,
Ouzh ma goulioù 'zo en noazh,

Sellet ma mamm, dimeus ma goulioù
'Zo bet graet gant o fec'hejoù.

Pere 'deus graet gant o fec'hejoù :
Mont a raint en tan war o genou.

- N'hoc'h eus kev soñj mat, ma mab,
Pa oan-me ouzh ho tougen dre ar bed,
C'hwi ho poa din-me prometet

C'hwi ho pos din-me prometet
A netra ne vijen refuzet,

Bremañ, ma mab, e refuzet a-grenn
Ar bardon 'wit' ar bec'herien :

Ma mab, roet d'ê ar pardon
Ha gant ur gwir gontreksion,

Ha gant ur gwir gontreksion
Ha soñj Jezuz en o c'halon.

- O geo, ma mamm, me o fardono,
Met ret 'vo d'ê ober pinienn goro.

Pa oa Mari en hent o vonet
'Deus rankotret an droukspered :

- Fella duze, tra milliget,
Gant an diaouled, da gonsorted.

- N'hellan kousket na de na noz
Hag ec'h ê c'hwi Mari 'zo kaoz,

Fot laoskel ar pec'her 'n e roll
Ewit nac'h ey ar bed da goll.

Sanktus, Sanktus, Sanktus !

Bet kanet gant Soaz an Heweder,
intañvez Poullien, ganet d'an 13 a viz
ebrel 1867, e Kervaria-Sular, hag ivez
gant Anna Mari Gov, eus Ploubêr?
Miz gouere 1952.

Sell. ouzh Soniou an Uhel, levrenn 2,
p. 332, a ro un destenn diglok, mesket
gant ul lodenn gentañ disheñvel he
darvez.

Soaz an Heweder a anve kement-mañ
An Te Deum e brezhoneg. An ton a veze
kanet ganti gant frankiz awalc'h.

